

D'ar 27 a viz Ebrel

- Er IVre kantved, en Tebaid-Uhel, war ribl an Nil, sant Teodor Tabenna, abad. Bez' e voe diskibl sant Pakom hag e penn Kongregadur menec'h Tabenna.
- E 1152, en eskobiezh ar Mañs e Bro-C'hall, ar gwenvidig Adelin a Etival (Gg. Alleaume), beleg penitiour, diskibl sant Roperzh Ervrezel, diazeour Abati Etival.
- E 1272, e Toscana, santez Zita, gwerc'hez. Merc'h d'ul liorzhour paour eus Lucca e tegase skoazell da labourioù an ti hag el liorz. D'he daouzek vloaz e krogas da werzhañ frouezh er straedoù ha d'he zric'hwec'h bloaz ez eas da vatezh en tiegezh Fatinelli lec'h ma tiskouezas un habasketed skouerius betek he marv.
- E Breizh, sant Konven pe Konwen, beleg penitiour en deus roet e anv da barrez Plougonven e Bro-Dreger.
- E Kernev-Veur, er Vvet kantved, santez Nevelin, merzherez, a savas un iliz e-kichen Pensans (bremañ Newlyn).
- En enez Vanav, war-dro 488, sant Maughold pe Malgand, penitiour hag eskob. Hag eñ tiern iwerzhonat o ren fallvuhez ar vorlaerion e voe kanttroet gant sant Padrig hag en em dennas en enez Vanav (Eubonia) lec'h ma vije bet anvet eskob.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Azeg (Iw. Asach), eskob-abad Elphin, diskibl sant Padrig.
- E Breizh, e 1819, distro da Zoue ene Jean Hyacinthe Marie Lecudon, genidik a Bont-Skorv e Bro-Wened, e varvas evel ur sant, d'e 16 vloaz, e kloerdi bihan Santez-Anna-Gwened.

D'an 28 a viz Ebrel

- E 171, e Ravenna, merzherenti santez Valeria Milano ha sant Vital Ravenna, kerent ar sent Gervez ha Protez. Diskuliet da vezañ kristen e voe taolet Vital en ur puñs ha mouget gant mein ha traezh. Valeria a voe skoet ha jahinet kement ha ma varvas diwar he goulioù daou zevezh war-lerc'h.
- E 1841, en Enez-Futuna, merzherenti sant Pêr Chanel, beleg marist. Ganet e voe en eskobiezh Bellay e Bro-C'hall, merzher kentañ Okeania e voe.
- E 1962, e Magenta nepell diouzh Milano, santez Gianna Beretta Molla, mamm a diegezh santel a gavas gwelloc'h hag hi dougerez ha klañv en em aberzhiñ hag espern buhez he bugel kentoc'h eget he hini.
- Er IVre kantved, e Bro-bPikardia, ar santezed Grimonia (Gl. Grimonie pe Germaine) ha Proba (Gg. Preuve). Genidik eus Bro-Skos pe eus Iwerzhon, an div briñsez yaouank-mañ gounezet d'ar feiz kristen a guitaas o bro evit tec'hout rak o zud chomet pagan a felle dezho o eurediñ. Lazhet e voent gant o c'himiniaded nepell diouzh Laon.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Loudiern (Iw. Luigtighearna), eskob Aled (Sant-Maloù). An Iwerzhonad-mañ, diskibl sant Ruadhan, keneil sant Koulman e Bangor (Iwerzhon), a voe abad Iniz Tom ha penitiour e-kichen Kêr-Sant-Maloù.
- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Kronan, eskob-abad Ros Cré.

- E 1716, e Saint-Laurent-sur-Sèvre e Bro-C'hall, ganedigezh en neñvou sant Loeiz-Vari Grignon a Voñforzh, beleg kiminiad e Breizh hag e Kornôg Bro-C'hall. Ganet e Moñforzh e Bro-Sant-Maloù e savas levrioù speredel diwar-benn ar Werc'hez Vari pergen, diazezañ a reas un urzh kiminiaded a zeuas da vezañ ar Voñforzhed (Monfortains), Leanezed ar Furnez ha Breudeur Sant-Gabriel.

D'an 29 a viz Ebrel

- Er Iañ kantved, sant Tichig, diskibl sant Paol a ra anezhañ « e vreur muiañ-karet, e vaodiern feal hag e geneil » hag a fizias ennañ e lizher d'ar Golosiz (kv. Kol 4,7) ha d'an Efeiziz (kv. Ef 6,21).

- Er Iañ kantved, e Piza e Toscana, merzherenti sant Torpez (Gl. Tropez ; Lt. Torpetius pe Torpelius). Ganet eo Caius Torpetius en un tiegezh patrikianed eus Piza. Hag eñ ofiser donezonet kaer e voe dibabet gant an impalaer Neron evel merour e balez. Merket da ziwall an Abostol sant Paol e voe gonezet d'ar C'Hrist feiz drezañ. Embann a reas e feiz da-geñver ur gouel aozet en enor d'an impalaer, neuze e roas hemañ urzh d'e lazhañ. Ar gouezed avat a c'hourvezas dirazañ, ar peul ma voe staget outañ a dorras hag a lazhas ar bourrev neuze evit echuiñ gantañ e tivizer e zibennañ.

- E 1109, sant Hugues Cluny, abad Cluny e Burgondia. Gant santelezh e renas e abati hag e vanatioù stag e-kerzh ouzhpenn tri ugent vloaz o terc'hel d'ar reolenn hag o tifenn gwirioù an Iliz.

- E 1380, e Roma, santez Katell a Sienna, gwerc'hez, doazhourez eus an Iliz. Pa voe degemeret e-touez Leanezed ar Binijenn savet gant sant Dominig, e pleustras da anavezout Doue enni, d'en em anavezout e Doue ha da eiltaoliñ skeudenn ar C'Hrist kroastaget. Gant nerzh ha hep ehan e stourmas evit ar peoc'h hag evit lakaat da zistreiñ ar pab e Roma hag adc'hounit kenunaniezh an Iliz. Pa varvas e lezas war he lerc'h dielloù hollbouezus a gelennadurezh speredel.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Segondel, penitiour, diagon, keneil sant Friarzh. Diagon yaouank e oa pa voe kaset gant sant Felis, eskob Naoned, evit skoazellañ sant Friarzh a oa penitiour war enezenn Vinduneta e Bezenez e Bro-Naoned. Mervel a reas a-rak e vestr hag e voe sebeliet gantañ. Goude marv an daou benitiour e c'hoarvezas kalz burzhudoù war o bezioù a vez miret e kev-iliz Bezenez.

- E Kernev-Veur, Vvet kantved, santez Endellion (Endelient, pe Edellienta), penitiourez e Trenteny. A orin eus kreisteiz Kembre e vefe c'hoar sant Neizhan (pe Nectan) Hartland ha neuze merc'h Brec'han.

- E Breizh, e 1682, distro da Zoue ene Mamm Mari-Agnes (Dimezell Andigné de Kermogaro), leanez eus kouent ar Weladenn en Naoned.

D'an 30 a viz Ebrel

- Er Iañ kantved, distro da Zoue ene sant Itrop pe Eutrop (Eutropius e latin), eskob Santon (Saintes) e Bro-C'hall, merzher. Kiminiad a orin eus ar Reter e vije bet kaset gant ar pab sant Klemez evit avielañ Gallia. Enoret kenañ e Breizh. Hervez an hengoun e vefe a orin eus Persia hag e vefe bet kaset gant ar pab sant Klemez evit avielañ Galia. Lod all a lavar en dije anavezet Jezuz hag e vije deuet a-gevret gant sant Marsial eleze erruet gant santez Mari-Madalen er Brovañs. Kehelet e vez e meur a lec'h e Breizh ma vez pedet enep d'an dourgoeñv.

- E 693, e Barking e Bro-Saoz, sant Erconwald, eskob London. Mab Anna, roue Angled ar Reter, breur santez Etheldred, santez Ethelburga, santez Sexburga, santez Wilburga, ha santez Sebrida. Diazezañ a reas e Barking ur manati evit ar wazed a renas eñ e-unan, hag unan evit ar maouezed a voe renet gant he c'hoar santez Ethelburga.

- E 1572, e Roma, sant Pius V, pab, lean eus urzh ar Brezegennerion. Ur wezh staliet war sez sant Pêr e stagas gant kalz a zeolietzh ha gred abostolek da lakaat da bleustriñ desentezioù Senez Trento a-benn ratreañ al liderezh, ar geennadurezh hag ar diskiblezh en Iliz war un dro gant embannidigezh ar feiz. Dre berzh pedenn ar Rozera en doa goulennet e voe gonezet emgann Lepanto war an Durked deuet da aloubiñ ar gristeniezh.

- E 1672, e Bro-Gebeg, santez Marie an Enkorfidigezh, leanez. Marie Guyart Martin a oa mamm a diegezh e Teurgn ha goude marv e gwaz e fizias he mab Claude en he c'hoar evit mont da leanez e urzh an Ursuladezed ha mont d'ar C'Hanada lec'h ma splannas he radwerc'hioù heverk.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Ammon, tiern arvorigat ha kiminiad kehelet e Pleskob e Bro-Wened.

- Er VIvet kantved, sant Ammon, tad sant Samzun.

- Bepred e Breizh, en VII vet kantved, santez Onnenn, gwerc'hez ha penitiourez e Tregorenteg nepell diouzh Ploermel, merc'h sant Judael ha santez Prizell, c'hoar sant Judikael.

- E 1175, sant Hamon (Gl Aymon), manac'h ha beleg e Savigny en eskobiezh Avranches en Normandia. Genidik eus Bro-Roazhon e fellas dezhañ mont da vanac'h en abati Savigny hogen nac'het e voe dre ma soñjed e oa lovr. Lezet e voe da brederiañ da vanac'h hag int lovr evit gwir. Dont reas a-benn da vezañ beleg hag e voe fiziet ennañ d'ober war dro ar vreudeur lik ma tiskouezas kalz a garitez en o c'heñver.

- E Kembre, er VI vet kantved, sant Kenoul, breur sant Deniel aet da vanac'h e Bangor ez eas da benitiour en hanternoz Bro-Gembre.

- En Iwerzhon, e 982, sant Farannan, eskob Ard Macha. Studiañ a reas e Luik hag a brezegas dre Velgia, abad Waulsort.

D'ar 1 añ a viz Mae

- Gouel Sant Jozef labourer, savet gant Pius XII e 1955. Kalvez eus e vicher e labouras sant Jozef evit pourveziñ da ezhommoù Mari ha Jezuz hag e anlaezas Mab Doue da labour an dud. Diwar-se ez eo skouer ha gwarezour al labourerion.

- Er I añ kantved, Abostoled kentañ Bro-Spagn, merzherion. Kaset e vijent bet gant sant Pêr ha sant Paol o-unan : sant Torquatus e-kichen Grenada, sant Ctesiphon e Verga, sant Secundius en Avila, sant Indaletius e-kichen Almeria, sant Cecilius en Elvira, sant Euphasius e Andujar, sant Hesychius e Gibraltar.

- En III de kantved, merzherenti sant Ephise, abostol Enez-Sardigna. Hag eñ genidik moarvat eus Bro-bPalestina e oa komandant ur rannlu roman eus an impalaer Diocletianus hag e ranke freuzañ kumuniezhoù kristen an enezenn p'en em ziskouezas ar C'hrist dezhañ. Gounezet d'ar feiz e voe neuze dibennet.

- E 258, en Aleksandria, merzherenti sant Philosophus. A-benn e lakaat da zinac'hañ e feiz, hag eñ den yaouank, e voe staget noazh war ur gwele blot ha lezet etre daouarn ur c'hast. E-lec'h en em lezel da vezañ trec'het gant ar blijadur e krogas en e deod gant e zent ken e droc'has hag e skopas ouzh dremm a vaouez a dec'has spontet. Neuze e voe dibennet an test kalonek.

- E 524, merzherenti sant Sigismond, roue Burgondia. Hag eñ roue Burgondia ha dimezet gant merc'h Ostrogoth roue Italia, e tilezas disivoud Arius evit ar feiz katolik war levezon sant Avit

eskob Vienne. En Agaune e Bro-Suis, war bez merzherion legion Teba, e savas ur manati gouestlet d'al laus perennis. En em dennas eno evit ober pinijenn hogen e rankas tec'hout rak e enebourion c'hall hag e voe taolet en ur puñs nepell diouzh Orleañs.- E 402, e Forli en Emilia, sant Peregrin Laziosi, lean eus Urzh Servijerion Mari. Diwar e zeolietzh d'ar Werc'hez e c'hounezas e ouestladenn da Jezuz, e breder evit ar beorion, e habaskted er c'hleñved. Pareet dre vuzhud eus ar c'hrank e vez pedet evit an dud taget gant ar c'hleñved-se pe gant kleñvedoù grevus all.

- E 558, distro da Zoue ene sant Markoul (Gl. Marcouf, gl. Marculphe), abad Nantus (Nanteuil) hiziv Saint-Marcouf-de-l'Isle e-kichen Coutances, Mignon e oa da sant Laod. Patrom iliz Karantoer en eskobietzh Gwened. Ganet e Bayeux e dibenn ar V vet kantved e voe urzhiet beleg gant Possessor eskob Coutances. Avielañ a reas ar c'hKotentin hag ivez inizi Mor-Breizh, eleze Jerzenez, gant e ziskibl sant Elier.

- E Breizh, war-dro 510, sant Brieg, kentañ eskob manati Sant-Brieg. Ganet eo war-dro ar bloaz 409 en Aberteifi e Bro-Gembre, en un tiegezh illur eus Enez-Vreizh. Dont a reas da vezañ diskibl sant Garmon Autesiodurum a oa bet kaset da Vreizh gant ar pab da stourm ouzh disivoud Pelagius. Bet degaset da C'halia gant sant Garmon e voe stummet Brieg gantañ ha beleget kent distreiñ da enez Preden lec'h ma labouras da avielañ e genvroiz. Dre ma teue diskibled niverus d'en em lakaat dindan e renerezh en o bodas en ur manati savet war zouarou e dud. War-dro ar bloaz 480, da abardaez-nnoz ar Pantekost, pa oa war-dro dek vloaz ha ri-ugent, e voe galvet gant Doue da zont d'an Arvorig. Neuze e treuzas ar mor gant daou c'hant eizh manac'h ha tri-ugent hag e tilestras en Aber-Ac'h, war aodoù Bro-Leon, kent mont betek aber ar Yeodi e Bro-Dreger lec'h ma savas ur manati a voe fiziet war-lerc'h en e niz sant Tudual. Diwezhatoc'h e tizhas aber ar Goued, bremañ porzh al Lege, lec'h m'en en stalias e-kichen ur feunteun, kent diazezañ e vanati war un dachenn roet dezhañ gant e genderv Rigwal, mab Derog, tiern Domnonea. Bez' e voe orin kêr Sant-Brieg a voe savet diwezhatoc'h evel eskobietzh gant Nevenoe, e 844.

- E Breizh, sant Berrien, penitiour e Kernev.

- E Kembre, Vvet kantved, ar sent Gleviad ha Egwen, mibion Gwenlev ha Gwladuz, breudeur sant Kadoù.

- E Kembre, er bloaz a c'hras 600, sant Azaf, eskob Llanelwy. Ganet er Flint ha kenderv sant Deniel kentañ eskob Bangor, e voe diskibl sant Kendiern.

- En Iwerzhon, er VI vet kantved, sant Kelleg (Iw. Ceallach), eskob diskibl sant Ciaran Clúain Mhic Nois.

- War-dro 730, sant Kellan, abad Peronne, Iwerzhonad, diskibl sant Fursa.

- Gouel sant Kaourintin an hañv ha Dedi iliz-veur Sant-Kaourintin e Kemper (gwezhall e veze lidet d'an 22 a viz Here).

D'an 2 eil a viz Mae

- War-dro 127, en Attalia e Pamphylia, merzherenti santez Zoe, sant Hesper he gwaz, hag o bugale sant Siriag ha sant Teodul. Da vare an impalaer Adrian e oant e servij ur pagan, hogen dre ma embanjont o feiz, e voent jahinet hag, en diwezh, taolet o fevar en ur fornez da vezañ dêvet ez vev.

- E 373, distro da Zoue ene sant Atanaz, eskob Aleksandria, doazhour eus an iliz. Den uhel e santelezh hag e ouiziegezh e voe lakaet war sez Aleksandria. Adalek mare an impalaer Kustentin betek Valeñz, e-doug 49 bloaz e eskobelezh, e tifennas reizhkredenn Goursenez Nikaia diwar-benn

ar Gomz, Mab Doue "unsolwez gant an Tad", enep eskibion niverus gonezet da gelennadurezh Arius. Rediet da vont d'an harlu meur a wezh e voe trec'h hag e tistroas d'e iliz. Brudañ a reas uhelvennad ar vanac'helezh o skrivañ Buhez Sant Anton. Lidet e veze sant Brieg d'ar 1 añ a viz Mae a oa deiz kentañ an hañv hervez an deziadur kelt, deiz gouel Beltan hag a zo ar gripi - hanter erer hanter leon - al loen-arouez anezhañ a gaver war skoed kêr Sant Brieg marteze hepken evit diskouez unvanidigezh leon ar re vMonvorzh hag erer ar re Pentevr.

- E 907, sant Boris Bulgaria, khan (roue) ha manac'h. Hag eñ o tont eus ar baganiezh e voe gonezet d'ar feiz war levezon unan eus e c'hoarezed, ha badezet

e 864 gant un eskob deuet eus Bizantion hag a gasas diwezhatoc'h eskibion evit diazezañ an Iliz er vro. Echuiñ a reas e vuhez evel manac'h.

- E Breizh, er VIIIvet kantved, santez Aven, penitiourez e Naoned, c'hoar sant Benead Mazereg, ganet e Patras e Bro-C'hres.

- En Iwerzhon, sant Kleder, manac'h, Iwerzhonad.

- D'an hevelep deiz, sant Neizhan (Iw Neachtan) manac'h, breur sant Kleder.

- E Kernev-Veur, sant Genez, eskob ha merzher.

- Er Vvet kantved, sant Garmon ar Skosad, eskob kiminiad e Gallia, merzher. Mab un tiern eus Iwerzhon, e voe ganet er V vet kantved ha badezet gant sant Garmon Autesiodurum. Goude bezañ prezeget gant gred dibar e Gallia, e Breizh-Veur hag er Broioù-Izel e voe drouklazhet gant ar mac'homer Hubald war wrimmenoù Normandia ha Pikardia.

- E 665, sant Gaoberzh, (Lt. Waldebertus, Gl. Valbert, Gaubert), abad Luxovium e 629, diskibl sant Koulman.

D'an 3 a viz Mae

- Gouel an ebestel sant Fulub ha sant Jakez, Ebestel, merzherion. Fulub, ganet e Bethsaïd, diskibl sant Yann-Vadezour, evel Pêr hag Andrev, a voe galvet gant an Arloz da vont war e-lerc'h. Meur a-wezh en Aviel e vez o klask lakaat ar C'hrist "da vezañ gwelet" pe "gwelout an Tad." Jakez, anvet "ar minor", a ouarnas Iliz Jeruzalem hag e vez lakaet war e anv ul lizher eus an Testament Nevez. Hervez hengoun an trinubium, e oa evel Jud, mab Alphe ha Mari Kleofaz, merc'h santez Anna eus e eil eured gant Kleofaz breur sant Jozef. Gwezhall e vezent goueliet d'ar 1 añ a viz Mae da-geñver treuzlec'h o relegoù e brientiliz an 12 Abostol e Roma.

- E 115, e Roma war ar Via Nomentane, merzherenti sant Aleksañdr I añ, pab. E gorf a voe toullet a daolioù minaoued en o lakaas da c'houzañv e-pad hir amzer. En diwezh e voe dibennet gant daou veleg sant Evenz ha sant Teodul.

- E 286, en Antinoe e Tebaid e Bro Egipt, merzherenti sant Timozeos hag e wreg santez Maor, merzherion. Lenner e oa Timozeos da vare heskinadeg Diocletianus. Dre ma nac'has reiñ al Levrioù Santel e voe jahinet war un dro gant e wreg, en aner avat. Ar barnour a roas urzh d'o c'hroastagañ an eil a-dal d'egile oc'h eveshaat d'o lezel da vervel goustadig. O verzherenti a badas neuze nav devezh leun.

- D'an 3 a viz Mae 326 e Jeruzalem, dizoloidigezh ar Groaz Santel gant santez Helena, mamm an impalaer Kustentin.

- En VIII vet kantved, sant Ethelwin pe Elwin, eskob Lindsey, mignon sant Egbert. Mont a reas d'en em stummañ e manatioù Iwerzhon.- E Kembre, distro da Zoue ene sant Kollen, eskob.

- En Iwerzhon, e 520, sant Konlae (Iw. Conlaedh ; Gl. Conleth), eskob Cill Dara.

Prizet e oa gant eskibion e rannvro hag e voe galvet gant santez Berc'hed da harpañ buhez speredel e vanati hag ar re all diazezet ganti.

- E Bro-Skos, e 563, sant Skannal, manac'h diskibl sant Koulmkell en enez Iona.

- E Breizh, e 1723, an Tad Gabriel, beleg misioner Kabusin, diazeour Kenvreurizh ar Groaz e Kintin, a varvas e-doug ur mision e parrez Ar Voudenn nepell diouzh Loudieg lec'h ma voe sebeliet.

- E 399, diazezidigezh Abati Lokeltaz Rewiz gant Grallon roue Kernev.